



GUERZ NEVEZ,

*Var sujet ar muntr coumetet var Yoen GRALL,
hostis e Landivisiau, en nosvez an 30 d'an 31 eus
a vis guenveur 1844, gant Louisa EGO, e vreg,
ha Yoen RENAOT, pere zo condaonet d'ar maro,
en tribunal Qemper, ar 4 eus a vis east 1844.*

Var ton GUERZ THEOPHILUS.

Ranna ra va c'halon gant ar glac'har em c'hreiz,
RO sonjal peguer stanc eo ar c'hrimou en Breiz :
A boan e zeus c'hoec'h mis d'eur maro eris voet test,
Ma ranqer adare gûelet memes arvest !

Allas, ô va Doue ! ref eo disclêrya c'hoas
Eun torfet hac a blonch er galonou ar gloas :
Eur c'hrim meurbet eûzus a zo bet coumetet
En kêr Landivisiau.... An oll zo spouonet.

An naonet varnugent a c'henveur diveza,
Grall a ro eur repas d'e dud gant calz a joa.
Da zeg heur eus an nôz e zeas da gousqet
Leun a gontantamant ha laouen e speret.

An deiz varlerc'h vintin, er gambr p'oet antreet
E cavjot Yoen Grall en e voele lazet
Gant eun tenn fusuil voe tennet dindan e c'hronch :
An oll voa spouonet; n'ouiet petra da sonch.

Eur fusuil, evit gûir, voa var ar gambr ene,
Hac eur ruban staguet eus ar gachen ive;
Qementse a drouble an dud a voa eno :
Na vouient da betra tamal eur seurt maro.

74 Yn. 105

Ar barner eus a beoc'h zo qerqent arruet;
Goude e enclascou en deveus constatet
Penos voa n'em lazet e-unan Yoen Grall,
Ha dre ze ne voa qet da damal da zen all.

Daou zen eus ar justic a zisqennas en ty,
Evit ellout donet da glasq n'em assuri
Var güirionez ar c'hrim, hac o deus decidet
E zoa Grall e-unan a voa en em lazet.

Na gomzet mui nemeur demeus an affer-ze;
Marteze e sönjet e chomje ewelse;
Mes lagad ar justic a zo lemm deiz ha nos,
Hac a zell meurbet pjz, hep qemeret repos.

Ar brud a red souden en Breiz e peb canton,
Hac a êru memes er guær eus a Roazon.
Lez ar Roue qerqent a zo bet instruet
Eus an torfet horrubl a bini e comzet.

An ugent a vis meurs, hep na voat o sönjal,
E zoa var lec'h ar c'hrim un avocat-general
Hac eur c'honseiller eus lez royal a Roazon,
Vit en em assuri eus ar pez voa güirion.

An autrones-ze zo chommet ugent devez
E kær Landivisiau gant ar brassa eves
Evit donet a benn eus ar pez a glasqent,
Hac anfin, goude oll, qendrec'het mad e voent.

Goude meur a euclasq, ec'h ordrenjont qemer
Louisa Ego, greg Grall, hac er memes amzer
Ivez Yoen Renaot, dre ma zoant soupçonet
Da veza bet o daou autoret an torfet.

Da brison Montroulez voent qerqent digasset
Evit en tribunal beza interrojet.
Eno en audianç neuze e tecider
O c'hass da gondaoni da dribunal Qemper.

Ar zeizvet varnuguent demeus a vis even
A brison Crec'hjoli o güeljet o tisgen,
Hac e voent cunduet de Guemper d'ar prison,
Da zepord deiz terrupl o c'hondaonaton.

Eur mis just int chommet ebars er prison-ze,
O tepord gant encreñs ar moment lac an de
E pere e vije var o stat decidet,
Pe int a voa coupabl p'otramant ne voant get.

D'al lun, nao varnuguent demeus a vis gouere,
Dorojou o frison a zigor diraze,
Hac e voent cunduet diouc'h-tu d'an tribunal,
El lec'h m'oe digoret an audianç ractal.

Eur foul eus ar vrassa voa eno diredet,
Leun sonn e voa ar zal, an oll a voa goasqet :
An daou accuset zo bet qerqent azeet
Var o banc, vis-a-vis d'an autrones jureet.

Ouspen pêvar-uguent test a zo bet clêvet,
Ar pez a guemeras eun amzer vras meurbet.
Seiz devez e zeo zet padet an debatou :
An deiz n'oa get avoalc'h, ret e voa caout goulou.

Anfin, d'ar bêvar cost, da dost da anter-nôs,
Ar jury a antre..... An oll zo o c'hortos
Gant an eves brassa var an daou accuset
Menos eus ar jury.... Den na vionje ebet.

Chef ar jury neuze en deveus disclêryet
E voa'n daou accuset coupabl eus an torfet.
D'ar maro int o daou condaonet goude ze :
E kar Landivisiau e collint o bue.

Heur o bamediguez a voa an heur eûzus,
An heur m'en devoe lec'h ar c'hrim qen horrerus.
Ze a dleye laqat anê da gaout sonch mad
Eo anaveet ar c'hrim abret pe divezat.

O clêvet e setanç, Renaot rê nebeut câs,
Mes Louisa a voele gant eur goal glac'har bras.
Lec'h e devoa certen, o sônjal dont d'e bro
Da zouffr dirac an oll an horrupla maro.

Rappellet o devez d'al lez cassation,
Mes approuvet eo bet o c'hondaonation;
Sônjal a reant caout o c'hrac ouz ar roue;
Mes penos en obten vit o c'hrim, va Doue!

D'ar meurs daouzec mis Dû, Renaot zo erruet
E kaer Landivisiau, hac er prison laqet,
Da zeport antronos ur maro horrerus;
Renaot n'em abandon da vadelez Jesus.

Da unnec heur anter e zeo bet cunduet
Var blacen vras ar foar, elec'h ma voa savet
Instrument ar maro, daou vinistr a Jesus
A zisqûeze an ên da Renaot maleurus.

An drizec a vis Dû eus ar bloa tremenet,
E d'oa Barba Ropars coumetet e zorfet,
An drizec a vis Dû, ar maleurus Renot
E kaer Landivisiau zo pignet d'ar chaffot.

Presantet voe dezàn ar grucifi santel;
Poqat a ra dezàn gent monet da vervel:
» Pardon! ô va Doue; mont a ràn d'ar supplie,
» Da reperi va c'hrim, dre'r brassa sacrific.

Breizis, güir gristenien, c'houi pere a voe test
En kaer Landivisiau eus an horrubl arvest,
Pedit evit Renaot, ma yêlo da repos,
Gant grac un Doue mad, gantàn d'e Varados.

Ar fin maleurus-mâ a dle dont da laqat
Ar c'hoant da heuill atao peb compagneuz vat.
'Tec'hit ouz al luxur, sourceu a vil bec'het,
Bevit honestamant, christenien mad bepret.

Maleurus den yaouanc ! perac na c'heus tec'het
Objet eus da youl fall, p'e c'heus hanavezet !
Te voa grêt da ober boneur da oll lignez,
Bremâ vint maleurus bete fin o buez.

Louisa Ego a chom e Qemper er prison,
Da c'hortos partial evit mont da Roason ;
Ar c'hraç eus e buez vo eno dei lennel,
Hac e Landivisiau goude-ze exposet,

E lec'h souffr ar maro, vit e c'hondaonation
E tremeno ar rest e buez er prison.
Eno' c'hello sônjal peguement maleurus
E zoar d'en em bellat demeus hent ar vertus.

Ur bobl niverus bras a voa en em rentet
Var blacen ar suppliç ; mes pa zint bet quîtet,
Un dristiguez vras o laç en glac'har !
Allas ! güelet a rent cass Renaot d'an douar !

Istre vit ar bobl-ze a voa en em gavet,
E voa ouспен ze c'hoas eno en em rentet
Archerien Montroulez, Castel ha Landerne,
Hac anter-cant soudard a voa ive ene.

Pa güitâs ar prison a Guemper, e c'houlen
Pelec'h e voa Louisa, hac hi deuje souden.
Ar bêlec a respont : Louisa zo graciêt,
Hac ar paour qez Renaot en deveus lavaret :

O Doue, va C'houer, m'ho suppli ma teuyo
D'en em gonvertissa ervad Louisa Ego ;
Graç ma teuyo d'ober ur binijen güirion
Ha ma ello ouzoc'h obteni ar pardon.

Person Landivisiau, leun demeus a ançen,
A adress en ilis da Zoue e beden
Evit ar maleürus, pa zea d'ar maro :
Enor ra vo dezàn e pêvar c'horn ar vrô.

Un Jristidiguez vras a eljot remercout
Var bisajou an oll ditedet a bartout :
Oll e clêmet Renaot; pep den a greiz calon
A iimplor-evitan ouz Doue ar pardon.

FIN.

COPI EUS A LIZER RENAOT D'E DAD.

Va Zad qer,

Pa recevfot ar lizer-mâ, ho mab maleürus en devezo achue da veva.

Demeus a dribunal an dad, en dêvezo da dremen da un tribunal all, e pehini en deus ar-gonfiang ferm da nonpas e gaout didruez.

Roet e meus bet deoc'h lec'h eus a galz a boanniou epad rên va vuez nebeut padus : qemer a rân ar moment-mâ evit testeni deoc'h va oll gueuz, hac obteni ar pardon euz anezo. Mar teurvezit en accordi din; n'am ancounac'haît qet goude va maro.

Offr a rân ivez va adie d'am breudeur ha d'am c'hoarezet mad : ra na dec'hint e nep tra demeus a hent ar vertuz ; ra heuillint an aliou mad a zo bet roet dezo gant o zad vertuzus. Ellout a rân assuri dezo ne gavint ar boneur, memes adalec ar vuez-mâ, nemet er pratic gürion demeus o deveriou a religion.

Ra bardonint din an oll gaou a meus ellet beza bet en o andret ; ra bardonint din dreist oll da lezel ganto, dre va maro eüzus, un tarch qen dies da effaci.

Qent mervel, va diveza peden a vezo evidoc'h, va zad paour ! hac evidoc'h-u, va breudeur ha c'hoarezet mad ha tener. N'am ancounac'haît qet en ho pedennou.

Landivisiau, teir heur arauc va maro, an 13 a vis Dû 1844.

Va breur-caër ha va c'hoarezet-caër a zo comprenet er recommandationou a adressân d'am breudeur propr, hac e pedân eus a greiz va c'halon an A. Troussel (*) da bedi Doue evidon.

Ho Mab, YOEN RENAOT.

(*) Person Sant-Serves, e barres.

Ar merc'her 18 Qerzu, *Louisa Ego*, êruet eus a Roason, a zorti eus a brison Montroulez, da 8 heur eus ar mintin, evit mont da Landivisiau. Da greiz-dez nemet quart e tleye êruout, mes-arêti a eure var hed 3 denn fusuil a-guær, evit êruout an tol a greiz-de. O sortial eus ar c'har en em harpas var brec'h ar charetour, bete ma teuas an 2 vourreo d'e c'hemer. Delc'hel a rê e fenn stouët.

Pigna eure d'ar chaffot hep harp, hac epad ma clasqe unan eus ar bourrevien ur gorden da staga anezi, eguile ar setanç, Louisa a voa en he za, hac e fenn stouet tristamanl. O veza staguet, mes he memprou libr, hac o velet savet coef he mantelê, e tisqennas he c'hoef var he daoulagad, hac e c'holoas e bisach gant e mouchoer godel, en eur scuilla daëlou. — Chom a eure exposet adalez creizdez betec un heur. 50 soudard eus a Vontroulez, 100 a Vrest, ha jandarmeri an arroudismanl a voa deut da Landivisiau evit qenderc'hel an urz. — Etro pad e exposition, e voa calz a dud o sellet outi : darn a c'hrosmole, mes calm bras e voet. Gouscoude, pa voe cunduet betec er meaz a gueur evit antre er c'har, nombr a dud e heuille, en eur gomz fall diouti. Anfin, poursu a eure e hent, ha rentet e Sant-Thegonnec, e qemeraz un tassad cafe, hac e voe digasset da brison Montroulez er memes devez, eus a behini e vezo cunduet d'ar prison a zo destinet dezi.



976 **RECIT**

Eus an darvoud meurbet horrubl digüezet e Montbouton, tost da Bedford, en nosvez an 10 d'an 11 eus a vis gouere diveza, 1844.

Var ton : DEOMP-NI OLL BREMA.

DEUT oll da zelaou, me hor ped,
Eun darvoud horrubl arruet
Tost da Bedford, e Montbouton,
A ra spouroni ar galon.

Eur gorventen avel eûzus,
Cuezet var templ santel Jesus,
A vranl-an ilis en antier,
Hac a lanç an dden en êr.

Neuze ezeo en em dolêt
Er pêvar c'horn eus ar vêret,
Gant eur fulor eus ar vrassa,
Hac eun drous eus ar spontussa.

An oll beziou zo difframmet,
Ar c'horfou en êr zo stringet:
Ean horrol vije beza test
Demeus eur c'hen horrubl arvest.

Pa deuas an deiz da darza,
Voa eur foul vras eno dija.
Eur c'hri fors a leusqet dre oll,
O velet gen terrubl horrol.

Güelet a rêt a bep costez
Corfou hac a voa en o fez,
Memprou distag, ha relegou,
A sclasse an oll galonou.

Autoriteou eus ar guær
En em gavas en hêr amzer
Er véred, a voa disfontet,
Hac a rente an oll spontet.

Eus a bep tu voe digasset
Gant soign hac ar brasa respet
Relegou paour an dud maro
Da veza entêret eno.

Anfin, gant soign ar gristenien
Gouscoude e teujot a ben
Da ellout dont da repari
Dizurz horrubl an tempest cri.

Mes, daoust m'eo eno reparaet
Ha qempennet oll er véred,
Atao e teuy sonch er memor
Un arvest qer leun a horror.

Breizis oll, christenien güirion,
Pedomp Doue a greiz calon
Na vezo biqen hór brô test
Demeus eur c'hen horrubl arvest.

FIN.